

## PROGRAMM AR RUMMAD « BALE HA KAOZEAL »

### Pal ar rummad « Bale ha kaozeal »

D'ar re n'o deus ket c'hoant da chom azezet evit heuliañ kentelioù, e vo kinniget dezhe mont er-maez eus al lise evit ober baleadennoù tro-dro da Gastellin.

**Kinniget eo dreist-holl d'ar re a zo bet meur a wech e KEAV hag o deus graet kalz a rummadoù dija.** Bale ne vo ket a-walc'h avat. Pal kentañ ar rummad-mañ zo lakaat an dud da gaozeal. Pourmen a vo da gentañ tout un digarez evit kaozeal brezhoneg. Bemdeiz ; a-raok mont kuit e vo graet un displegadenn verr war dachenn an distagadur. A-hed an devezh e klasko pep hini lakaat e pleustr ar pezh a vo bet desket diouzh ar mintin.

Etre 10 ha 13 km a vo kerzhet bemdeiz ha er rummad-se e vo **12 stajiad d'ar muiañ.**

### Petra a vo graet ?

- Ur valeadenn bemdeiz, nemet d'an deiz e vefe graet unan all gant an holl stajidi. D'an devezh a vez kaozeet gant brezhonegerien ar vro e vo kerzhet diouzh ar mintin nemetken.
- Bemdeiz a-raok mont kuit e vo graet ur displegadenn verr ( 9<sup>e</sup>- 9<sup>e45</sup> ) diwar - benn an distagadur, war ur poent resis : an taol-mouezh, ar vogalennoù berr hag ar re hir, ar vogalennoù dre fri.... E-pad ar valeadenn e vo graet c'hoarioù, evezhiadennoù diwar-benn danvez an deiz.
- Baleadennoù eus 10<sup>e</sup> betek 4.30<sup>e</sup> eur goude kreisteiz. Gant ur piknik. War-dro 10-13 km. Da skouer : a-hed ar ganol, tro-dro d' ar Menez Hom, war roudoù Jakez Riou e Lothey, koad ar C'hranou... nebeutoc'h eget 15 mn bleniañ bewech.
- Displegadennoù a vo graet a-hed ar valeadenn diwar-benn an istor, diwar-benn an douaroniezh, diwar-benn traoù a-vremañ, mojennoù, ha kement 'zo.
- Ma vo glav e vo klasket mont e mirdioù, en ilizoù kentoc'h... Met ne raio ket glav !
- Essylt Louarn ha Herve Saliou a raio war-dro ar rummad-mañ.

### Evit kemer perzh

- Digor d'an holl re a zo **en o aes e brezhoneg** ha tud gouest da gerzhet 4 eurvezh d'ar muiañ.
- Dont gant botoù bale, dilhad evit ar glav ( kenkaz... ), ur sac'h-kein da lakaat dour hag ar piknik.
- Ar re o deus ur c'harr-tan a vo degemeret mat tre... Met ar re all ivez !

**EVEZHIADENN** : Ar stajidi o devo lakaet o anv er rummad “Bale ha kaozeal” a zisklêr **bezañ gouest da chom er rummad-se betek fin ar sizhun.**

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.